

• cf Kan ha Gwerz T XI X H/I





DIALOG

ETRE

UN DOCTOR


HAC

UR BUGUEL.



E QUEMPER,

MOULET GANT E. BLOT, MAB.





DIALOG

ETRE UN DOCTOR HAC UR BUGUEL.

An Doctor.

BONJOUR, Mabic : pelec,h it-hu ?

Ar Buguel.

Da glasq ur Mestr e zàn un tu.

An Doctor.

Me a so Doctor , ha mar quirit ,

Me raï scol deoc'h , mar am pedit.

Ar Buguel.

Bet oun er scol gant Doctoret ,

Ha tout o c'havàn asennet ,

O clasq disqui da bep unan

Ar pez ne ouzont quet o-unan.

An Doctor.

Petra ne oar an Doctoret ?

Ar Buguel.

Meur a dra so ne ousont quet

An Doctor.

Ha te a oar mui evit-o ?

*An Doctor.***Peur en em goll ur c'hrouadur?***Ar Buguel***Pa ro d'e zad displijeadur.***An Doctor.***Petra ra dezàn mont da goll?***Ar Buguel.***Beza re lezet en e roll.***An Doctor.***Pelec'h e tesquer folleutez?***Ar Buguel.***O henti goal compagnunez.***An Doctor.***Piou so dangerus o henti?***Ar Buguel.***Nep so sujet da sotoni.****Dibaot Buguel a hent tud sot,****Eus o sotoni na zesq lod.***An Doctor.***Piou a respont anezo?***Ar Buguel.***Nep a so Tad ha Mam dezo.***An Doctor.***Petra eo never Tad ha Mam ?**

*Ar Buguel.***Miret o bugale divlam.***An Doctor.***Penaus hellont-y e ober?***Ar Buguel.***Oc'h o sugea da chom er guer :****Mar o lesont re da vale ,****E tuint libertin , hep dale.***An Doctor.***Peur e tleer o instrui ?***Ar Buguel.***Dious o speret dre ma tui.***An Doctor.***Peur e tleer o c'hourigea ?***Ar Buguel.***Pa zint bian , eas da blega.****Faciloc'h eo plega planten ,****Evit na deplega guezen.***An Doctor.***Peur e tleer o dimisi ?***Ar Buguel.***Pa o deus oad ha faltasi.****Guelloc'h eo dimisi merc'h ,****Egued caout anquen varlec'h.**

An Doctor.

**An Tad , ar Vam , hac int a dle
Ober stad eus o bugale ?**

Ar Buguel.

**Tad a ra stad eus e Vabic
En desq da veza map prodic ;
Ha Mam e ra stad eus he merc'h ,
Peur-liessa a ouel varlec'h .**

An Doctor.

**An Tad , ar Vam , hac int a dle
Rei o zraou oll d'o bugale ?**

Ar Buguel.

**Sotoni vrás ve da un dén
Discregui tout eus e voyen ,
Ha rancout goulen goud'ese
E ezomou ous e bugale .**

**Seantoc'h eo goulen oc'h Tad ,
Evit d'an Tad goulen dious Mab .
Guelet hon eus meur a exempl
Etouez tud cre ha tud sempl ,
Ar bugale o caç rac-tal
O Zad , o Mam d'an hospital .**

An Doctor.

**Etre piou en tieguez
Ne vez nemeur a garantez ?**

Ar Buguel.

Etre bugale ha Lesvam ,
 Ispicial mar deu d'o blam ;
 Rac al Lesvam ne quet caret
 A galon vad gant minoret :
 Dibaot Lesvam a gar ive
 Bugale all queit hac e re.

An Doctor.

Ha te oar micher priedou?

Ar Buguel.

Clevet em eus o douareou.

An Doctor.

Peur vez carantez etrese ?

Ar Buguel.

Pa ne zeffot netra deze.

An Doctor.

Ha peur e vanq an union?

Ar Buguel.

Pa vanq dezo pourvision.

An Doctor.

Ha peur e vezont e coler?

Ar Buguel.

Pa vanq unan en e zever.

An Doctor.

Piou so cassaüs d'an oll?

An ioul hac ar graguez foll.
En un desers eo guell beza ,
Ha caout eno peoc'h da veva ,
Evit n'en deo chom assambles
Gant grecg ebet , mar de folles.

An Doctor.

Hac ar Graguez a gar ar guin ?

Ar Buguel.

Eus a enor ne dint quet din.
Ur Vrecg so custum da effa ,
A bep hent tout ne dal netra ;
Oc'h bep honestis e sar dor ,
Hac oc'h pep pec'het e tigor.

An Doctor.

Petra servich cana ur Vrecg ?

Ar Buguel.

Lacât e maliç da redec.
N'en deus Sarpant dangerussoc'h ,
Leon na Dragon terruploc'h ,
Evit ur Vrecg so e coler :
Ous e c'hanna so mil danger.

An Doctor.

Peleac'h e caffet-hu Vrecg vad ?

D'an Enê e renquer d'e c'herc'hat.

An Doctor.

Nac ar Plac'het, va bugale quez,

Ha te c'heus oute carantez?

Ar Buguel.

Va Zad en deus va c'helennet

Na dostaïn james ous plac'het;

Rac tromplus int cals aneze,

Ha colet ar bed-mâ gante;

O min a so douç eguis mel,

Hac a zeboch meur a vuguel;

Mæs ne vezet quet pell ganto

Eguis ar vestl na dint c'huero,

An Doctor.

Petra a ra da gals a dud

Divar o fen caout mil disput?

Ar Buguel.

Petra ma zeo an dud-se sot

Eus a vil maler clasq o lot.

An Doctor.

Ha te azne plac'h fur ebet?

Ar Buguel.

N'emeus quet cals anavezet:

Ar plac'het fur, var a gelvàn

Ne din quet comun er vro-màn.

An Doctor.

Pe da lec'h eta int-hi êt?

Ar Buguel.

Elec'h ne deus quet a voaset.

Biscoas plac'h fur na oa pell,

O henti goas, na ne voe vell.

An Doctor.

Ha na dleer quet en eñ henti

Evit caout lec'h da zimisi?

Ar Buguel.

Dimisi a so permetet,

Mæs sotoni eo quemeret

Ur plac'h e deus meur a c'hallant,

Hac eus an oll a so countant:

Guell eo guenèn caout ur mignon,

Evit ur plac'h en donæson.

An Doctor.

Ha te c'heus calz a vignounet?

Ar Buguel.

Ne ansavàn mignon ebet.

Ar mignounet eus ar bed mân,

So inconstant, var a glevàn:

Cals bras a dud a vez tromplet

O re fiziout er mignounet.

An Doctor.

Pegueit e pad ur vignonaich?

Ar Buguel.

Bete'n ezom , pas davantaich.

Nep en deus arc'hant hac a ro ,

A gueff mignounet e peb bro ,

Mar deu ezom dezàn goude ,

E vignounet en dishene.

An Doctor

Petra ra nep a brest arc'hant

Da ur mignoun hep caout goarant?

Ar Buguel.

C'hoant col en deus hervez fæçoun

Hac e arc'hant hac e vignoun :

Quinder-gompes out pa brestit ,

Ha dêñ ingrat pa c'houlemit.

An Doctor.

Na neb a ra un donæson ,

Petra sonch-èn en e galon ?

Ar Buguel.

Songeal a ra en devezo

Daou c'hement mui evit na re ,

Panevet-se certenamant

Nebeut a zén a rea presant.

Hac èn so dèn e nep canton
N'en deus adversour ha mignon?

Ar Buguel.

Dibaot a zén a so er bed-mâ
N'en deus ur c'har hac eur c'hassa.

An Doctor.

Pe dious piou e renquer tremen?

Ar Buguel.

Diñch a bed-oll mar be moyen,
Rac ne deus dèn na ell ober
Ha drouc ha mad gant an amser.

An Doctor.

Peleac'h e sao dissantion?

Ar Buguel.

Eleac'h ma vanq soumission,
An dud superb a sav ato
Un disput bennâc etrezo.

An Doctor.

Na pe ous piou ne renquer quet,
Caout james disput ebet?

Ar Buguel.

Ne dleer caout gant hini,
Ma na eller quet e trec'hi.
Marc'h a resist oc'h ar c'hentrou

A ra gaou bras ous e gostou ;
 Ha sot eo dêñ da resista
 Ous nep so creoc'h evinta.

An Doctor.

Penaus e fach ar vignounet ,
 Na peur e vezont accordet ?

Ar Buguel.

Livar ar guin peur-liessa ,
 E custumont en em facha :
 Ha d'o accordi goudese ,
 E renquer caout guin adarre.

An Doctor.

Ha te oar ive effa guin ?

Ar Buguel.

Re yaouancquic e c'hoas va min
 Gant an Doctoret el lesàñ ,
 A raï guel usaich anezàñ .

An Doctor.

Nep so pedet da ur banquet ,
 N'en de quet sot ma n'en da quet ?

Ar Buguel.

Furoc'h e cals mar chom er guer ,
 Ma na oar effa dre voder.

An Doctor.

Petra ra an hini a eff re ?

Ar Buguel

Disqui d'ar bed-oll e zoare :
 Pa ves secret, mar bez mezo ,
 Quement a oar a lavaro ,
 Ha cals c'hoas avizion ouspen ,
 Pa sao e vanne en e ben.
 Ar paoura , tout efet dezàn ,
 A so pinvidic , emezàn ;
 Ha couscoude en deveus poan
 O clasq caout youd sillet da goan.

An Doctor.

Piou a ra d'an dud guella cher?

Ar Buguel.

Nep en deus joa oc'h e ober.
 Digant mignoun eo guell caout dour
 Evit guin digant un traïtour.

An Doctor.

Mar ez pe arc'hant , te esse guin ,
 Evit beza yaouanc da vin ;
 Mæs n'elles nemet effa dour ,
 Abalamour ma out paour.

Ar Buguel.

Me n'emeus nac arc'hant nac aour ,
 Ha couscoude ne doun quet paour ;
 Pinvidic oun couls ha nicun ,

Pa zoun countant eus va fortun,
 Ha clevet am eus e peb lec'h
 Eo guell dour ha bara sec'h,
 Evit caout arc'hant leis an ty,
 M'an d'ê countant nep en deuz hy.

An Doctor.

Piou a zesir ha n'en deus quet?

Ar Buguel.

Nep a frip ha ne c'houni quet.
 Dibaot e gueler ur prodic
 O chom pell amser pinvidic ;
 Dibabot iveau ur feneant
 A zestumo cals a arc'hant.

An Doctor.

Piou so beo hac en deffe naon?

Ar Buguel.

Nep a chom re bell var e scaon.

An Doctor.

Piou ne vilit quet a sicour?

Ar Buguel.

Nep a so cre, ma na labour.

An Doctor.

Petra eo avantaich ar re paour

Var nep en deus arc'hant hac aour?

Ar Buguel.

Un avantaich a so caër,
N'o deus nep aon rac al laër,
Rac ne veler quet al laëron
O vont nemeur en o c'hanton.

An Doctor.

Peleac'h eta e vezont-hy?

Ar Buguel.

Eleac'h ma santont eus ganty.

An Doctor.

Piou so custum da laëres?

Ar Buguel.

Nep an deus aon rac paourentez.

An Doctor.

Ha crezqui a ra ar voyen

O quemer madou an estren?

Ar Buguel.

James dën ne pinvidica

Oc'h ober gaou ous e nessa:

Ar madou drouec-acquisitet

Na brosperont gant dën ebet.

An Doctor.

Nac ar madou destumet pront?

Ar Buguel.

Dissilla prest a gustumont.

An Doctor.

Hac al laëron a ell miret
 N'o deffe quet a boan speret ?

Ar Buguel.

Natur al laër eo beza lent :
 Caout aoun ha spont pa ze en hent.
 E sonch dezàn ez eus bepret
 Ur re bennâc oc'h e redec.

An Doctor.

Pet seurt laëron so er bet-mâ ?

Ar Buguel.

Difficil ve o niverra :
 Ma ve an oll examinet .
 Nebeut a zén just a gaffet :
 Hac ar pez am eston muya
 Hac a ra poan din da songea
 Eo ma renter e pep canton
 Enor d'ar brassa laëron ;
 Hac un nombr bras a re zister
 Dirac an oll a bunisser.

An Doctor.

Piou a gar enor ar bed-mâ ?

Ar Buguel.

An oll a so countant anezâ ?

An Doctor.

Piou a ra enor d'e nessa?

Ar Buguel.

Nep eu deus carantez ountâ:

Renta enor hep carantez,

So trahison pe traïtourez.

An Doctor.

Peur e chènch an dud faltasy?

Ar Buguel.

Pa gresq ar madou en o zy.

Dibaot hini , mar deus nicun ,

Na chènch humor , pa chènch fortun ,

Ar fortun vrás , an enoriou ,

Eus a Sænt a ra diaoulou.

An Doctor.

Nac ar re a glasq enoriou ,

O publia o vertuziou ?

Ar Buguel.

Dibaot ar yar ne goll e ui ,

O cana re goude dezi ,

Ha dibaot d'en em bompat ,

Na goll e boan oc'h ober vad.

An Doctor.

Ha te eus joa ous an enor ?

Ar Buguel.

Ne glasquàn quet a zizenor.

An Doctor.

Pe an enor pe ar madou
 Eo ar guell eus a zaou?

Ar Buguel.

Guell eo brut-mad da bep-hini
 Evit caout madou leis an ty.

An Doctor.

Hac ar bed-oll a glasq enor?

Ar Buguel.

Couls an Azen hac an Doctor:
 Dibaot an dêñ, mar deus nicun,
 A so contant eus e fortun.

An Doctor.

Petra a gredes-te eus an dud
 A so custum da gaout goal vrud?

Ar Buguel.

Dibaot chiminal a voguet
 Anez na ve tan en oalet :
 Dibaot en deus goal renom
 Na de clouar, ma na de tom.

An Doctor.

Pe oc'h tra ec'h eus-te joa?

Ar Buguel.

Ous un dra vad pa er c'havàn.

*An Doctor.***Petra a vad a blich dide?***Ar Buguel.***Beza bepret e graç Doue.***An Doctor.***Ha te ec'heus c'hoarzet biscoas?***Ar Buguel.***Ne gredàn quet em be grêt c'hoas;****Clevet em eus o re c'hoarzin,****Na zestiñer nemet chagrin,****Goude c'hoarzin e teu gouela,****Goude c'hoari huanada.***An Doctor.***Perac e remerquit pep dêñ****Bremâ trist hac e ber laouen?***Ar Buguel.***Allas! dre ar c'henta pec'het****D'an inconstanç omp oll sujet;****Ha ne ell dêñ, moralamant,****Beza laouen parfetamant,****Quent a allo evit biquen****Possedi ar mad souveren,****Rac bepret an adversite****So harp oc'h ar brosperite.**

Ha te oar ive petra ra
 Ma zeus cals countant er bed-mâ
 Ha cals all pere ne dint quet,
 Carguet a chagrin o speret?

Ar Buguel.

Ar stad en eus ar c'houstianç
 Pervuia a ra an diffaranç;
 Rac nep a vev e guir gristen,
 So patient en e anquen,
 Evel Job int countant bepret,
 Er c'hlènvet couls ! ac er yec'het;
 Bepret o deveus resignanç
 D'ar gundu eus ar providanç;
 Mæs er c'hontrol an dud mechant
 A souffr ato diæsamant.

An Doctor.

Petra eta na sonchont-hy ?

Ar Buguel.

Difficil bras eo distrei
 Coz guezen so drouc da blega,
 Quenta en torre evit heüna
 Un dêñ yaouanq da fall pa za,
 Ne vella quet evit coussa,
 Pe mar chènch un draïc bennâc,

Ne gencho quet a galon vad
Ur c'hos louarn hac èn dare,
Goelet ur yar c'hôas a garre :
Anep na chènch a vir galon,
Agar ar goal occasion.

An Doctor.

Me vel erfat, Buguel yaouanc,
Ne zeffot quet dit a squiant ;
Mæs lavar din pe seurt micher
Aguemeri gant an amser ?

Ar Buguel.

C'hui so Doctor ha dêñ savant,
Livirit din ho santimant.

An Doctor.

Me falfe din, pa zout abil,
Reit did un etat dificil.

Ar Buguel.

Difficulte a so partout,
Roït din unan dioc'h va gallout.

An Doctor.

Me vel erfat ne gueres quet
Nac ar groagues nac ar merc'het ;
Mar queres, e raes fortun ,
Otimesi couls a nicun ;
Mæs pa ne zint dioc'h da zivis ,

Ret e did beza dêñ a Ilis ;
 Ha mar queres en ur redec ,
 M'ho tesquo da veza bælec.

An Buguel.

Eus a guemense n'oun quet din ;
 Ha ne garàñ quet effa guin.

An Doctor.

Petra vezi-de-ta ? Manac'h ?

An Buguel.

Aoun bras emeus n'am be re veac'h ,
 Ar froc so dies da zouguen ,
 Ha me gred ez eus meur a zén ,
 Ma hellent o chènch oc'h rochedu ,
 A raë franquis er c'houènchou.

An Doctor.

Me vel erfat diouc'h da humeur
 Na vezi quet na Tad na Breur ;
 Mæs mar queres da viana ,
 Avocat ec'h illi beza.

An Buguel.

Ma ven avocat e ranquen
 Souten ar gaou hac e zifen ;
 Ha rei cusul da zep-hini
 Dious e humor ha faltasi ,
 Peautramant em dismeganc

Chom hep pledi en audianç.

An Doctor.

Petra vezi-de-ta ? soudart?

Ar Buguel.

Ne doun quet custum dious an art ;

Ar soudardet tout peurvuia

A zesq laëres a zesq pilha.

Hounes a so un etat fail ,

Ret e clasq din ur vicher all.

An Doctor.

Pa na blich eta er bed dit ,

Ret e din da gaç da hermit.

Ar Buguel.

Roït eta din un hermitaich ,

Ne c'houlennan quet davantaich ;

Ret evit chom etoues an dud ,

Em eus aoun bras n'am be goal vrud.

An Doctor.

Pe seurt goal vrut a pezo-de ,

Mar bevez mad hervez Doue?

Ar Buguel.

Ar bed-oll a so dicriet ,

Ha n'o deffe quet faciet ;

Ar Væleyen couls a re all

A so sujet d'an teodou fall ,

Ar Venec'h paour er c'houènchou
 N'int quet exant dious teodadou ;
 Ar priedou , ha tad ha mam
 A so bepret dindan o blam ;
 Ar groagues ques hac ar plac'het
 A so ganto disenoret ,
 Mæstr ha mæstres o tempesti ,
 Servicher o feneanti ;
 Tud a justiç o ruina ,
 Ar varc'hadourien o trompla ,
 An dud-gentil o voual-dreti ,
 Ar baysantet o vurmuri ;
 N'en deus itron na demesel
 A ve exant dioc'h o zravel .
 Ar bed-oll so tud fall dezo
 Ne chomin quet gante er vro .

An Doctor.

Pa hoc'heus aoun rae an teodou fall ,
 Me raï dit un avis all :
 Studi caer da beza doctor ,
 Dêñ ne doucho ous da enor .

Ar Buguel.

An doctoret couls ha re all
 A so sujet d'an teodou fall :
 Enoret ve o c'halite ,

Pa ne vet o superbite ;
 Hennes eo viç dud savant ,
 Gaout vanite eus o squiant .

An Doctor.

Va buguelic , fouettet viot ,
 Rac re liger oc'h a zeot .

Ar Buguel.

Mar bezàn fouettet , me so sur ,
 Nep am fouetto ne va quet sur .
 Perac fouetta ur buguel quez ,
 Pa lavar ar virionez ?

An Doctor.

Ar virionez a ro cassaüs .

Ar Buguel.

Ya , d'an nep a so cablus .
 Red eo lesel nep en deus gal ,
 D'en em gravat ha da c'hognal .
 Nep a gundu ur goal vuez ,
 A vezò flemet alies .
 Parlant a rit eus fouetta ,
 Fouetit oc'h azen da guenta ,
 Ha miret ho squiant gueneoc'h ,
 Me gavo guel mæstr evidoc'h .

FIN.



